

8N3-5-015


J.A.C

GLOAR DA VARI

"YAOUANKIZOU KRISTEN AR MAEZIOU"

Eskopti Kemper oc'h en em ouestla d'ar Werc'hez Vari

- I. V. ar Porzou 9 a viz Mae,
- I. V. Ti Mamm-Doue... 16 a viz Mae.
- I. V. Kernitron..... 23 a viz Mae.
- I. V. Rumengol 30 a viz Mae.
- I. V. ar Follgoad 14 a viz Even.



KANTIG DA WERC'HEZED AR VRO

(Savet gant F. GUÉGUEN.)

Pa-tronez dous, I. tron ar Foll-goad, Taolit ho

Sell war vro Le . on ken du . di . us di .

.rak ho taou-la-gad hag a bell-zo tost d'ho ka . lon.

Diskan

E . vel Sa . laun, o Ma . ri . a,

(1) Uhel-vouezioù

(2) Izel-vouezioù
(E . vel Sa . laun,

Ni a c'hou lenn hor ba . ra

O Ma . ri . a.)

(1) An uhel-vouezioù hag an izel-vouezioù a o'hell eila ar c'han o muzelloù prenet pe o kana gwerzenn genta an diskan evel m'eo merket aman.

Patronez dous, *Itron ar Follgoad*,
Taolit ho sell war vro Leon,
Ken dudius dirak ho taoulagad
Hag a bell zo tost d'ho kalon.

DISKAN :

*Evel Salaun, o Maria,
Ni a c'houlenn hor bara.*

Itron Varia Ker an Itron,
Grit ma chomo, 'hed an amzer,
E pep spered evel e pep kalon,
Ar feiz kristen e bro Dreger.

*Gwerchez Vari, kreskit ar feiz
E pep parrez eus hor Breiz !*

Itron Varia Ru-Maen-Goulou,
Digasit d'eomp, a-berz Doue,
Da heul ar peoc'h e kêr hag er maeziou,
Yec'hed ar c'horf hag en ene.

*Itron Varia Rumengoll,
Bezit ato « Remed-holl ! »*

Itron Varia goz ar Porzou,
Bezit eun deiz ouz hor gortoz,
P'en em gavimp dirak dor an Nenvou,
War dreuzou porz ar baradoz.

*Itron Varia ar Porzou,
Digorit d'eomp an Nenvou !*

Itron Varia Ti-Mamm-Doue,
Bezit hor mamm madeleus
Ha skoazellit youankizou Kerne
Da vont d'ar red warlerc'h Jezuz.

*Itron Vari Ti-Mamm-Doue
Hon diwallit noz ha de !*

Betek ar porz, betek ar goudor,
Gwerchez Vari, *Gwerchez ar Joa*,
Henchit bepred merdeidi Arvor
'Vel eun tour tan sklaer o lintra.

*Gwerchez ar Joa, steredenn vor,
Kasit hor bag d'ar goudor !*

Patronez vat an tiegeziou,
Bennigit poan al labourer ;
Lakit frou-ez hag eost leiz ar maeziou
Hag e kanimp drant ha seder.

*Itron Varia ar Maeziou,
Santela-it hor poaniou,*

Rouanez dous, brevit ar gounnar
A lak an dud d'en em zrailha ;
Grit ma vleunio ar peoc'h war an douar
Ha m'o dezo an holl bara.

*Mestrez ar peoc'h, d'ho pugale,
Ro-it buan peoc'h Doue.*

Hon diframmit diouz fank ar pec'hed,
O *Gwerchez Lourd*, Gwerchez dinamm,
Kargit a c'hras hor c'halon, hor spered
Ha da Zatan ni roio lamm.

*O Gwerchez Lourd, e gras Doue
Dalc'hit bepred hon ene.*

Rouanez Frans, Itron Varia,
Gwelit ho pro din a druez ;
Hastit afo sikour ho merc'h hena
Hag e savo leun a vuhez.

*Klevit pedenn ho pugale,
Savit ar Frans hep dale !*

Rouanez Vreiz, taolit ho skoazell
War ho Preiziz e pep amzer ;
Ha diwallit diouz dismantr ar brezel
Hon holl diez ha parkeier.

*Itron Varia Vreiz-Izel,
Savit uhel he banniel !*

PEDENN YAOUANKIZOU KRISTEN AR MAEZIOU D'AR WERC'HEZ VARI

(War ziviz)

UNAN (pe eur strollad a-unan).

Itron Varia... Aman ano ar Werc'hez : I. V. ar Follgoad, Rumengol, Kernitron, ar Porzou, Ti Mamm-Doue... — diredet omp hirio — yaouankizou kristen ar maeziou tro-war-dro, — betek ho ti santel.

Gwechall goz — hon tadou a zo deuet aman niverus — d'ho meuli, d'ha trugarekaat, d'ho pedi. — Savet o deus ar japel-man — evit ma chomfe ganeomp, — goude o maro, — eun testeni sklaer eus o feiz, — eus o anaoudegez vat, — eus o c'harantez e kenver Doue hag ar Werc'hez ; — eur c'halvadenn ive d'ar bedenn — ha d'ar fizians — evit ar rummadou tud a zeufe war o lerc'h — hag a zougfe o ano.

A-dreus ar c'hantvedou — kristenien a villadou — a zo deuet aman — da gana o levenez pe da c'houlenn truez — da zizamma

o c'halon — da glask repu e gwasked ho kalloud hag ho madelez — da glask eun nerz nevez — evit kenderc'hel gant o hent... Distrei a raent d'ar gêr frealzet ha kennerzet.

Ni d'hon tro — gant hor moueziou yaouank ha krenv — a fell d'eomp hirio unani hor c'halonou gant re hon tud.

Enor ha meuleudi da Itron Varia...

AN HOLL. — *Enor ha meuleudi da Itron Varia...*

UNAN. — Er mare trubuilhus-man, — ni, tud yaouank, — a daol war an amzer da zont — eur zell ankenjet. — Petra vo ar bed a rankimp beva ennan ? — Kriz pe gunv evit mab-den ? — Kriz moarvat ! — Re all a zo hag a laka o fizians — e tud pe e traou ar bed-man. — Evidomp-ni a oar eo Doue — an hini a zo o ren ar bed, — ni a gred o deus ho pedennou d'eoc'h-c'houi, Gwerc'hez Vari, — kalz galloud war galon Mestr bras pep tra, — ouzoc'h-c'houi eo ec'h en em erbedomp.

Gwerc'hez Vari, — c'houi a zo mamm da Zoue, — fizians hon eus en ho kalloud.

AN HOLL. — *Gwerc'hez Vari, — c'houi a zo mamm da Zoue, — fizians hon eus en ho kalloud.*

UNAN. — Hor c'harout a rit, — Itron Varia, — ni a zo ho pugale, — breudeur omp da Jezuz ho mab. — Ho pet truez ouz youankizou kristen ar maeziou. — Kement all anezo a zo dianket war hent ar pec'hed ! — Holl ez omp gwasket gant ar brezel, — nec'het gant ar pezh a zeuimp da veza, — Davet piou ez afemp nemet davedoc'h, — c'houi hor mamm vadelezus.

Gwerc'hez Vari, — c'houi eo hor mamm, — fizians hon eus en ho madelez.

AN HOLL. — *Gwerc'hez Vari, — c'houi eo hor mamm, — fizians hon eus en ho madelez.*

UNAN. — Ar feiz a ya war ziskar e touez en dud yaouank, — trellet e vez hon daoulagad gant kement e welomp en dro d'eomp : — brezel a bep tu, — gwarizi ha kasoni etre an dud, — etre ar poblou. — Kalonou dizec'het gant ar c'hoant dastum arc'hant — pe breinet gant en hudurnez. — Eur goumoulenn a c'hevier hag a vreinadurez — a c'holo ar bed. — Horjella 'ra hor feiz deomp-ni ivez awechou. — Deuit, Itron Varia da skuba ar c'houmoul — evit ma lintro heol skedus ar feiz.

Gwerc'hez skedus — gant klerijenn ar wirionez — digorit hor spered d'ar sklerijenn.

AN HOLL. — *Gwerc'hez skedus — gant sklerijenn ar wirionez — digorit hor spered d'ar sklerijenn.*

UNAN. — Bezit evel eun tour-tan — war an hent a gas d'ar porz.

AN HOLL. — *Bezit evel eun tour-tan — war an hent a gas d'ar porz.*

UNAN. — Ni tud yaouank — a vez alies touellet hor c'halon ; — ar bed endro d'eomp a zo ken fallakr, — ennomp e verv a bep seurt youlou direiz. — A-frappajou e vez tenn ar stourmad, — hag e vennomp fallgaloni, — lezel da vont-evel kalz yaouankizou all dirollet ; — awechou ez omp bet kouezet, ni ivez, er pec'hed. — Grit 'ta d'ho skeudenn lintra — dirak hon daoulagad, — ho skeu-

denn ha n'eus anezi nemet santelez ha glanded, — o, c'houi, Rouanez ar zent hag an aeles.

Gwerc'hez Vari, Gwerc'hez dinamm — ni a ouestl d'eoc'h — hor c'halonou yaouank.

AN HOLL. — *Gwerc'hez Vari, Gwerc'hez dinamm — ni a ouestl d'eoc'h — hor c'halonou yaouank.*

UNAN. — O Mari, Gwerc'hez pur ha dinamm — ouzoc'h ni holl en em erbed. — Beilhit warnomp bepred !

AN HOLL (war gan, teir gwech.)

O Mari, Gwerc'hez pur ha dinamm — ouzoc'h ni holl en em erbed. — O Mari, Gwerc'hez pur ha dinamm — beilhit warnomp bepred, — bepred, — bepred !

✱

UNAN. — Eur mennad kaer a zo diwanet en hor c'halonou : — beza ebestel — dougen testeni d'an Aviel ha d'Hor Zalver — dre hor buhez — beza soudarded kalonek en emgann evit ar feiz — gounit d'ar feiz, d'eur feiz krenvoc'h, birvidikoc'h, — holl baotred yaouank ar maeziou, — o zikour da zantelaat o buhez, — da vaga en o c'halonou — gwir garantez evit Doue hag o nesa ; — klask *urzia* kristen ar bed. — Labour hag a zo dreist hor galloud ; — bezit en hon touez, bezit ganeomp.

Itron Varia, — Rouanez an ebestel. — Grit ma vezimp gwir ebestel er maeziou.

AN HOLL. — *Itron Varia, — Rouanez an ebestel, — grit ma vezimp gwir ebestel er maeziou.*

✱

UNAN. — Ha ma rankomp — evit dont a-benn eus hol labour — dioueret a bep seurt — gouzanv poaniou, dismegansou — ma rank hor c'horf pe hor c'halon beza gwasket, — bezit en hor c'hichen evit hor frealzi, hor c'hennarza.

Itron Varia, — Rouanez ar verzerien, — bezit hor skoazell — bezit hon nerz !

AN HOLL. — *Itron Varia, — Rouanez ar verzerien, — bezit hor skoazell — bezit hon nerz !*

✱

UNAN. — Evit ober gwelloc'h hol labour a abostolerez — hon eus savet kenetreomp, paotred yaouank — eun emzao nevez — an Ykam — yaouankizou kristen ar Maeziou. — A-benn breman eo boulec'het mat an ero ganeomp — met da benn e rank beza kaset. — Hirio e teuomp da ouestla d'eoc'h hon abostolerez — da ouestla d'eoc'h hon emzao — Kevredad Ykamiz eskopti Kemper. — Beilhit warnomp — evit ma vo frouezus hol labour — ha ma savo stank en hon touez — ar baotred yaouank a benn hag a galon, — plijadur e zud ha gloar Doue.

Itron Varia, — d'eoc'h hor c'halonou !

AN HOLL. — *Itron Varia, — d'eoc'h hor c'halonou !*

UNAN. — Itron Varia, — d'eoc'h hor strolladou-parrez !

AN HOLL. — *Itron Varia, — d'eoc'h hor strolladou-parrez !*

UNAN. — Itron Varia, — d'eoc'h kevredad Ykamiz eskopti Kemper !

AN HOLL. — Itron Varia, — d'eoc'h kevredad Ykamiz eskopti Kemper !

UNAN. — D'eoc'h holl yaouankizou kristen bro Vreiz !

AN HOLL. — D'eoc'h holl yaouankizou kristen bro Vreiz !

UNAN. — Ar rummadou tud a dremen — evel an dour er ster ; — c'houi a jom hag a bad. — Deuet omp war roudou hon tud koz.

Deuet omp da bedi evit hon tiegeziou — an tiegeziou omp bet savet enno, — lakit unvaniez ha karantez etre an dud a zehr ouz an hevelep taol — a gousk dindan an hevelep toenn. Deuet omp da bedi evit an tiegeziou a zavimp-ni, d'hon tro, eun dervez — beilhit war ar merc'hed yaouank — a vo eun dervez hor priejou.

Gwerc'hez Vari, — Rouanez an tiegeziou kristen, — beilhit war hor tiegeziou !

AN HOLL. — Gwerc'hez Vari, — Rouanez an tiegeziou kristen, — beilhit war hon tiegeziou !

UNAN. — Pep-hini ac'hanomp en deus e barrez, — aze eman an dachenn fiziell enomp ; — aze e kav harp hor feiz — d'eomp-ni da harpa hor parrezioù.

Gwerc'hez Vari, — beilhit war hor parrezioù !

AN HOLL. — Gwerc'hez Vari, — beilhit war hor parrezioù !

UNAN. — Bro Vreiz eo hor bro, — n'eus bro ebet moarvat er bed, — hag he defe savet kement a japeliou en hoc'h enor, — n'eus bro ebet hag e vefec'h bet pedet kement enni. — Netra nemet en hon skopti — na stank eo o tiez hag ho manerioù : ar Follgoad, Kernitron, Rumengol, ar Porzou, Ti Mamm-Doue, Kerzevot, Kreisker, Lambader, ar Joa, ar Sklerder...

Itron Varia Vreiz, — beilhit war hon eskopti, — beilhit war hor bro Vreiz !

AN HOLL. — Itron Varia Vreiz, — beilhit war hon eskopti, — beilhit war hor bro Vreiz !

UNAN. — Ar Frans a-bez he deus douget enor d'eoc'h — abaoe penn kenta hec'h istor. — Setu Chartres, Paris, ar Salet, Lourd, Pontmain, Le Puy ha kant ha kant a re all. Mall bras eo d'eoc'h, — Gwerc'hez Sakr — dont war zikour ha rouantelez.

Itron Varia Frans — beilhit war merc'h hena an Iiz !

AN HOLL. — Itron Varia Frans — beilhit war merc'h hena an Iiz !

UNAN. — Er bed n'eus nemet draill ha freuz — dirollet eo an dud. — Roit sklerijenn d'ar re a zo karget da ren ar poblou — evit ma kavimp adarre ar peoc'h.

Rouanez ar Peoc'h — ho pet truez ouzomp !

AN HOLL. — Rouanez ar Peoc'h — ho pet truez ouzomp !

LITANIOU GWERC'HEZED ESKOPTI KEMPER

Itron Varia Rumengol,	Pedit evidomp.
Itron Varia 'r Follgoad,	—
Itron Varia 'r Porzou,	—
Itron Varia Kernitron,	—

E Kerfeunteun, I. V. Ti-Mamm-Doue, *Pedit evidomp.*
 En Erge-Vras, I. V. Gerzevot,
 E Kemper, I. V. Lokmaria hag I. V. ar Chandelour,
 E Pluguen, I. V. ar C'hras,
 E Landrevarezeg, I. V. Kilinenn,
 E Landudal, I. V. Populo,
 Er Yeuc'h, I. V. an Holl-C'hrasou,
 E Poulhan, I. V. Kerineg,
 I. V. Rosporden,
 E Klobars-Fouesnant, I. V. an Drenneg,
 E Pouldreuzig, I. V. Penhors,
 E Ploneour-Lanvern, I. V. Languivoaz,
 E Pont-e-Kroaz, I. V. Roskudon,
 E Meilars, I. V. Gonfors,
 E Plogoff, I. V. ar Veach-Vat,
 E Pont-n-Abad, I. V. Garnez,
 E Kombrit, I. V. ar Sklerded,
 E Penmarc'h, I. V. ar Joa,
 E Plomeur, I. V. Treminou,

I. V. Gempelle, *Pedit evidomp.*
 E Banaleg, I. V. ar Veronig,
 E Melwenn, I. V. Grec'h-Igel,
 E Moelan, I. V. Lanriot,
 E Nevez, I. V. ar Sklerded pe I. V. Tremoren,
 E Trezunc, I. V. Kerven,
 E Nizon, I. V. Tremalo,
 E Kerrien, I. V. ar Sklerded.

E Kastel-lin, I. V. ar C'hastel hag I. V. Kerluan, *Pedit evidomp.*
 E Kast, I. V. Kallidoare,
 E Kemeneven, I. V. Gergoad,
 E Plomodiern, Santez Mari Mene-Hom,
 E Kameled, I. V. Rochemadou,
 E Pleiben, I. V. Lanneleg,
 I. V. Vrenniliz,
 En Huelgoad, I. V. an Nenv,
 E skrignag, I. V. Goad-Keo,

E Spezet, I. V. ar C'hrann,
E Goezeg, I.-V. ar Feunteuniou hag I. V. Treguron,
En Eder, I. V. an Niver.

✱

E Plougastel-Daoulas, I. V. ar Feunteun-Wenn, *Pedit evidomp.*
E Gwipavaz, I. V. ar Reun,
I. V. ar Merzer,
I. V. Penkran,
I. V. Tremaouezan,
E Plabenneg, I. V. Lokmaria-Lann,
E Plouguerne, I. V. ar Grouaneg hag I. V. an Traon,
I. V. Vrelez,
E Plouarzel, I. V. Trezien,
E Lokournan, I. V. al Levenez,
E Plouzane, I. V. Bodonou,

✱

E Kastel, I. V. Kreisker, *Pedit evidomp.*
E Rosko, I. V. Kroaz-Baz,
E Plouenan, I. V. Gerellon,
E Plougoulm, I. V. Brad-Koulm,
E Kleder, I. V. a Esperans,
I. V. Lambaul,
I. V. Vodilis,
E Ploneskad, I. V. Gerzean,
E Gwinevez, I. V. Garnez,
E Gwitevede, I. V. Verven,
E Plouvorn, I. V. Lambader,

✱

E Montroulez, I. V. ar Vur, *Pedit evidomp.*
E Sant Tegonneg, I. V. Wir-Zikour,
I. V. Blouyann,
E Plouneour-Menez, I. V. ar Releg,
E Taole, I. V. Beuzez,
E Karanteg, I. V. Gallot,
E Gwimaeg, I. V. ar Joa,

Aetre da voula :

Kemper, 19 C'hnevrer 1943.

P. JONCOUR, Vikel bras.